

**111 - Soudarded Ploneve' - Les soldats de Plounévez**

Jean PODER. Plonevez-Kintin (Plounévez-Quintin) 29.04.1978

La-kamp an tan war hon korn ha ke - me - ramp kou - raj,  
Pe vimp er - ru en Ber - lin e vo fin d'ar ve - aj.

Lakamp an tan war hon korn ha kemeramp kouraj,  
Pe vimp erru en Berlin e vo fin d'ar veaj.

Bep a vouchouer 'n hon dorn da sec'hañ hon déroù,  
Un devezh e moemp lâret da vourk Plone' kenô,

Kenavo dac'h, Ploneve', ma bro gêr benniget,  
Ha dac'h-c'hwi, ma mestrez koant, fleurenn an holl verc'hed,

Ha dac'h-c'hwi, ma mestrez koant, fleurenn deus ar c'hêrañ,  
Ya, matrezen siwazh din 'vit ar wech diwehañ.

Kant daouzek ha tri-ugent 'oemp deus a Vretoned  
Ha pe oemp e-barzh an treñ gant an hent i vonet.

Darn deuzomp 'yay da Wengamp, lod all da Sant-Brieg,  
Me 'oe ét betek Paris, enañ 'oen bet gwisket.

E Paris pe oen erru, me 'oe digemeret,  
'Oe enañ deus ma gortoz kalz a gamiraded.

An noz-se 'barzh ma gwele, e-mesk al liñserioù,  
Ar pôtrig a oe charmant, sav' a re's amourioù,

Ken a deuy din da soñjal 'barzh m'amzer dremenet,  
N'on ket ken e Ploneve' i vouchek d'ar merc'hed,

N'on ket ken e Ploneve' i vouchek d'ar merc'hed,  
Bremañ 'h on 'barzh er c'hazern, tout eh omp soudarded.

An de' war-lerc'h da veure, me klevet ur vouezh i lâret:  
Da Berlin 'vo ret monet war-lerc'h ar Brusianed,

Da Berlin 'vo ret monet war-lerc'h ar Brusianed,  
Da c'haloupat ar montagnoù 'lec'h biskoazh na n'omp bet,

Da c'haloupat ar montagnoù 'lec'h biskoazh na n'omp bet,  
Prest da denno war Guilhom pen 'o gwelet i ridek.

Tapamp hon sac'h war hon choug, hon fusilh en tu ell,  
Neuzen 'vo anoñset de', mammoù, tadoù santel ...

Allumons notre pipe et prenons courage,  
Quand nous serons arrivés à Berlin, le voyage sera terminé.

Chacun un mouchoir à la main pour sécher nos larmes,  
Un jour, nous avons dit au revoir au bourg de Plounévez.

Au revoir à vous, Plounévez mon beau pays béni,  
Et à vous aussi, ma jolie maîtresse, fleur de toutes les filles,

Et à vous aussi, ma jolie maîtresse, fleur des plus belles,  
Et peut-être, malheureusement, pour la dernière fois.

Nous étions cent soixante-douze Bretons  
Quand, dans le train, nous allions notre chemin.

Certains d'entre nous allaient à Guingamp, d'autres à Saint-  
Brieuc.  
Moi, je suis allé jusqu'à Paris, là, je fus habillé.

A Paris quand je fus arrivé, je fus accueilli.  
Là m'attendaient beaucoup de camarades.

Cette nuit-là, dans mon lit, parmi les draps,  
Le jeune homme était (d'humeur) charmante, il pensait à  
ses amours.

Je me mis à penser au temps passé,  
Je ne suis plus à Plounévez à embrasser les filles,

Je ne suis plus à Plounévez à embrasser les filles,  
Maintenant je suis à la caserne, tous nous sommes soldats.

Le lendemain matin, j'entendis une voix dire:  
Il faudra aller à Berlin après les Prussiens.

Il faudra aller à Berlin après les Prussiens,  
Galoper sur des montagnes où nous ne sommes jamais allés,

Galoper sur des montagnes où nous ne sommes jamais allés,  
Prêts à tirer sur Guillaume quand on le verra courir.

Mettons notre sac sur le dos, notre fusil de l'autre côté,  
Alors on leur annoncera, à nos mères et nos pères saints ...